

144

Ar c'hleved tom.

(85)

Var ton : Du haut en bas.

Ar c'hleved tom
 Ouz eun den eur vech ma ve stag'et,
 Ar c'hleved tom
 A louzou mad en deus ezom.
 C'hoas, m'ar c'leder d'ar vedesinet,
 Erzeo danjerusoc'h d'ar merc'het
 Ar c'hleved tom.

N'ouzer doare
 Pour beza distag diouc'h ar c'hleved,
 N'ouzer doare
 E pe feson beza pare.
 Meur a hini a zo bet scaotet,
 Ha re all a ell beza poazet,
 N'ouzer doare.

Etal an tan,
 Pa zer re dost e vezeur poazet;
 Etal an tan,
 Ha goudeze pebes poan!
 Neb en deus aon da veza poazet,
 Var eves ato e vez quelet
 En tal an tan.

(86)

(Vol. II, p. 85-86.)